

**Dizano : Moueziou ar vered.**

Bet embannet e 1902.

**Nell**

Trist e son kleier ar barroz,  
An evn a gan 'mesk ar bleun roz.

Evid an noz e' maro Nell,  
Nellig vihan, dous 'vel eun êl.

Dous 'vel eun êl, koant 'vel bleuniou,  
Ha pur 'vel dour ar feunteuniou.

'Barz ar vered 'oa bet kavet,  
Ha gand an touller bet savet.

An touller koz, e-eun 'n e di,  
'N-oa bugel, na den nemeti.

Hag adal ma halle kerzad,  
Nell 'yee d'ar vered gand he zad.

C'hoari a ree war ar hlazenn,  
Dierhen-kaer, 'mesk ar hlizenn.

Ha Nell a greske, fur ha mad,  
Mad ouz an oll ha fur dalhmad.

Me he gwel c'hoaz, 'vel he gwelen,  
Gand he sae hlaz, he blev melen.

He blev melen, war he diouskoaz,  
Ha koant 'vel na welis biskoaz.

Moned a ree 'hed ar hleuniou,  
Bemdez,bemdez, da glask bleuniou.

Bleuniou spern-gwenn, ken mad o hwez,  
Bleuniou drez-agroaz en o zouez.

Bleun prajeier a glaske c'hoaz,  
Ha bleun lili-dour deuz ar waz.

A-zornadou 'vijent serret,  
Da gas war veziou ar vered.

« 'Vid ma beziou, ma beziou ker,  
Me 'glask, emezi, bleuniou kaer. »

Er vered, kempennet ganti,

N'oa ket eur bez heb bokidi.

Ha 'vid an noz e' maro Nell,  
D'ar Baradoz 'zo eet eun êl.

Trist e son kleier ar barroz,  
An evn a gan 'mesk ar bleun-roz.